

CHANSON

Gret gant eur Caporal deuz an 248^e

VAR SUJET AR BREZEL 1914 A 1915

1^{er} Couplet

Itron Varia Vulat roet di sklerijen
Vit ma ch'ellin diskleria eur voalen pen-ar-ben
Honmon zo eur blaneden eur voalen a gasti
Sort biscoaz var an douar neuz bet parez dezi.

2

Lakaët eo om bro Franc barz ne brassa tourmant
Diskleriet zo deomp brezel gant an oll dud insolant
Ret eo d'an oll dud en oad kuitaet euz o bro
Abandonni barz ar guer tout an oil famillo.

3

Ar henta devez ar viz cœst deuz ar blavez parzek
Zo deklaret an hanvio gant ar chleier beniguet
Woar dro pemp heur anter oent kommançet dazon
Enn ton allarmuz meurbet ar mobilisation.

4

Me oa pell demeuz ma bro pa gleviz ar ch'ello
Ag a return prim d'ai guer d'ober ma ch'imiado
Da laret adieu d'ar vreg ag a oa din eureujet
A goude dan, tad dar vam pere mam ma maguet

5

Brema keno tad a mam a ma breudeur fidel
No peden sonjet ennon e kreiz tan ar brezel
Kenavo Anne Marie cœset da skuil daero
Pa vezo fin d'ar gombat me retorno d'am bro

6

Arog quitaet parouz Bulat eun dro barz an illiz
Itron Varia ma varouz miret o pretonniz
Roet d'imp nerz a courach dirag on ennemiet
Ar mar teuan var ma ch'iz me no hankouaïnkent

7

Kenavo kamarado pa neo ret kuitaët
Ben pegoulz a vin an dizro na n'ellan ket laret
Mez pa neo ret partian d'eomp tout a galon vad
E kano da roue ar zent a da zoue eun tad.

8

Setu me lançat en hent gant ma c'hamarado
Eun eur laret kenavo, kenavo ta ma bro
Houman vit omp ni a vo eun dro belerinach
Pa vo goneet ar victoir a vo fin d'om beach

9

Pa oemp aru er Gwengamp leun a oa ar ruio
Gant zoudardet Beiz-Izel hont da zifed ar vro
Bar e casern Tour d'Auvergn n'imp zo bet habillet
L'ech omp bet pad pemp devez ch'ortoz bean
[embarquet.

10

An navet devez an viz eost depart deuz ker
Epad mo oemp bet an train joaiuz a triumphant
Tremenet a moemp bord Pariz, Epernay a ker a
Ebarz en ker ar Rehel dizkenchomp deuz an train
[Gwengamp
[Reimz]

11

A hane oemp dirijet da frontierou Belgiq
Eur zac'h pounner woar omp choug ag eu amzer
Bet a moemp graet pevar etap klevomp a hanoniou
Gant ar Belget courajuz a tifen o droajou.
[a fatigue]

12

Ben an dri var ugent a viz eost creski re on glac'har
Egant nerz on hanoniou krena re an douar
Eben naveur heur deuz an noz oemp aru do zicour
E Montjumont oemp en contact egant an adver-
[sour.]

13

Var drodek heur deuz an noz oa lancet ar gombad
Kouël a re tan ar chouarn en o mesk ni breizad
Yudal re ar boulejo no mesk ni bretoned
A Kouël re dan douar kalz a gamaradet

14

Allaz na oemp ket a nerz deuz an allemantet
Ret eo d'imp ober demi tour a batti e retraite
A hane teuchomp a drevn ag a hed ag a dreuz
Da guemer position woar bord rivier ar Meuse.

15

Epad daou ze a diou noz eur gombat ar vrassan
Livromp deze var bord ar Meuse a talkichen Sedan
Neuze zo aru eun ordr da guitaët en dachen
Mar vijemp chomet pelloc'h h'oemp get prison-
[nerien.]

16

Setu franchisset ar Meuz ag on Frontierou
Gant ar monstret milliguet deuz eur an iferniou
Pere l'ec'h ma tremenet rent met tano a lac'ho
Divi on heriou a bez sioaz tud a vecho.

17

A hane a ch'alouppchomp etreec Tourteron
Ben pemp heuran de var l'erc'h zon a re ar hanon
Ag armée an Allemagn e oa ne fosition
Woar ar montagnou huel domine Tourteron.

18

Ben nao heur ar memeuz de cernet oemp adarre
Dont ar re dir a c'houarn demeuz an daou goste
Keno kazi velt eur cerel an dro d'imp d'aint formet
Mimp ni woa welt eur lapouz dastumet neur
[gaouek]

19

Heno kolchomp pevar hant den demeuz om
 Chonch a momp deuz Tourteron ag e ^[regiment]hombat
 Chasseet oemp adarre ma keret ma kredi ^[sanglant]
 Na oemp ket vit resistan deuz tan an artillerie.

20

Ret eo dare dont a drenv da bale deiz an noz
 Heb kavet amzer da zibi keneubet da repoz
 Ar convoyou ar civilet kez a woelomp bep mare
 O font arog tan ar brezel da zovetaet o bue.

21

Beteg départamant an Aub moemp renket reculi
 Eno an dud miliguet neuz kavet harp do fri
 Ben neuze o hanonion oa peb hini ne plaç
 Ag ar fantassin Français a zo dir oar e faç.

22

Ar choueç'h a viz gen golo krogaz er gombat vraz
 E camp Mailly a Somme ouz la Fère-Champenoise
 Homan eo bataille ar Marne pehini m'oemp gonëet
 Kaer vo guelet en histor en amzer da zonet.

23

Koueel reint vel quellen woar kreiz ar plenennou
 Ken a vijeket guelet wlet 'bleizi o vont barz ar ^[c'hoajou]
 Na oa forz deze pelech monet doent met memez ^[souben]
 Aze pefont o chrimon diwar goust o chrohen.

24

Ouspen daou ugent mille den zo kouzket dar ^[bochet]
 Ebarz en bataille ar Marne entre maro a blesset
 Ret eo deze mont var o c'hiz a n'imp d'euz o zeuillou
 A tan deze var ar blenen ken koulz velt ar c'hogou

25

Eur fent a voa o guelet a treuzi ar c'herriou
 Velt ar guiden arog oa chach téchel rog ar maro
 Ag o zud vlesset a kavemp dreuna teuomp warog
 Setu aman c'hoaz eur boch ag a neuz bet e lod.

26

Arça did boch didalvé sellu te e souffranç
 Poagnuz eo pelerinag an Itron Varia Franç
 Sell le tapet da fall a te abandonnet
 Mar vijemp bet quet fall achui a m'oemp da beur ^[l'achet]

27

Breman da gamarado eo ret deze monet war oc'hiz
 Zeuit ket da yont da feti ar blaman da Bariz
 Kavet a neuz harp de ben o chlaes laerez om bro
 Met Franç ag e soudardet mad neket c'hoas maro

28

Derlchen rejont reculi epad ugent kilomètres
 Met a ruz fall pruçian na ne biscoaz manquet
 Gouelet a rent ben neuze a doent kavet trech par
 A hint a hober toullou da guz barz an douar.

29

Setu ret d'imp arreti goude an holl gourach
 Ar louzet barz no zoullou den kent aon rog a chach
 Breman met gant ou hanonion nellomp o distruji
 Met an deiz sortiont ar mez difont c'hoaz var o fri.

30

Setu m'imp eiz miz so ebarz an trancheo
 Bet omp barz e Milin Souain breman e Coat-Sabot
 An dek devez a viz meurz gant ar vaionnettez
 Oa antreet ar françichen barz e Coat-ar-Votez.

31

Da ugent devez warlec'h oa dare combatsanglant
 An deiz se an 248^e golaz e hommandant
 Marfat eo permetet d'in lavarvt e hano
 Chef ar ch'ouechvet hataillon ar chommandant ^[Jubot.]

32

Koueet a oa glorieusamant e mesk a zoudardet
 An officier mat meurbet henor dean zo gleet
 Graç dan da vont ar baradoz an dan oll gamarado
 Pere neuz skuillet o goud evit Franç ag o bro.

33

Arog dont da finissan, henor da vretoned
 Vit bezan brezeiller mad neket ret gout gallec
 Hep dont da chifoqui den na droug komz deuz hini
 Ar breton zo zoudardet mad derag en ennemi.

34

An hini neuz gret ar zon man ne na braz na zavant
 Ag a zo barz e brezel aboute ar c'hommansamant
 Goulen ran graç digant Doue da return da Vreiz-Izel
 Da ec'hui ma chanson pa vo fin dar brezel.

35

A mar teui d'in koueal barz e kreiz ar gombat
 A recommandant ma ine d'an Itron Varia Bulat
 Hounez eo patronnez ma varouz mam an dud an ^[dezolet]
 An hini n'imp recommando dezi na veket aban- ^[donnet]

36

Camaradet a Vulat na zizkourajetket
 Gant patronnez on parouz n'imp a vo prezervet
 A pa vo fin d'ar brezel d'on glahar d'on ennui
 Gant kalz a zevotion a hemp di zaludi.

Jean LE BRIS

Caporal à la 23^e Cie du 248^e Rég^t d'Inf^{ie}

